


DISKAN - Eus e bep korn ar barrez
Sant Tudek, hor patron,
Ho pugale a zigouez,
Fizians leun o c'halon.

Embanner an Aviel,
Difenner Feiz ha Breiz,
Sant Tudek, eskop santel,
Warnomp beilhit noz-deiz.

oooo

- 1 - Direded omp d'ho chapel
Da c'houlenn diganeoc'h
Pedi an Dreinded Santel
Da rei d'eomp ar peoc'h,
Ar peoc'h en hor c'halonou,
Dallet gant ar pec'hed,
Ar peoc'h dre an holl broiou
Zo klask an etrusted.
- 2 - A-holl wiskoaz Sant Tudek
Zo pedet vel eun tad
Gantan e vezer barrek
Da jom war an hent mat
D'ar c'hlanvoue ro ar yec'hed
Hag a re pouter-gleo
Vez roet d'ezo da glevet
Mouez Doue ha mouez ar Vro.
- 3 - Hor Zant en deus labouret
E park an eneoù,
Hep damant en deuz hadet,
'pad e vuhez, grasou
Manati Restarmanac'h
Gwechall zo bet brudet
Hag evidomp eo dinac'h
Brud bras her personned.



- 4 - Klevet vez tud c'hoaz breman
O komz eus eur profed :
An amzer da zont-vitan
Ne doa sekret ebet.
Pell araok ma tigouezent
E ouie skler an traou.
Dre c'hbras Doue hag a Zent,
Biken 'n lavare gaou.
- 5 - Person epad an Dispac'h
Daoust d'ar brezel direiz,
An Aotrou Guillou SEAC'H,
Zalc'has start d'e Feiz :
Tollet oa bet er prison
Hag e Brest voe barnet :
Er Spagn, hon Aotrou Person
Da vervel voe kaset,
- 6 - Sant Kaourantin, Sant Eozen,
Deoc'h Sant Tudek a ro
Digemer en e gichen
Da weilha war hor bro.
D'eoc'h ni a rento enor
D'eomp - ni roit etrusted
Pa vo an eur roit digor
E palez an Dreinded.